



AR RUMMAD KEMBRAEG

An daou live

Daou live kentelioù a vo ar bloaz-mañ c'hoazh : unan evit an deraouidi hag unan all evit tud o deus ul live dereat hag a fell dezhe mont war-raok pe donaat o anaoudegezh eus ar yezh.

Kinniget e vo ar c'hentelioù gant Dafydd FRAILING, troour a-vicher, bet stajiad ganeomp abaoe bloavezhioù, Mike THOMAS, Kembread anezhañ, bet meur a wech e KEAV, Riwanon KALLAG, desket kembraeg ganti e Bro-Gembre hag e Breizh ha Brigitte KLOAREG, bet o chom e Bro Gembre e-pad un toullad bloavezhioù.

Lakat an dud da gomz a vo graet ha deskiñ dezhe ar frazennoù ordinal an implijetañ, setu ar pal d'an daou strollad, pep hini gant diaesterioù diouzh o live.

Kinnig kentelioù kembraeg en ur staj brezhoneg a roio deomp un digarez da ziskouez pegen heñvel eo ar c'hembraeg ouzh ar brezhoneg ha da lakaat war wel ivez an diforc'hioù pouezusañ a zo etre div yezh vodern. Un doare eo ivez da adskoulmañ an darempredoù etrekeltiek etre hon div vro.